


Hirio hor stad-ni'glag'harus
 A g'houlenn eun dorn truezus
 Da barea ar gouliou
 A reas deomp hor follenteziou.
 Hano ar c'haera :
 Itron Varia !

Deuit eta, Folgoat, Rumengol,
 Treguer, ar Porzou, Arvor oll.
 Ho deus izom eus ho skoazel.
 Morse n'omp bet g'hoas ken izel !
 Itron Varia,
 Hano ar c'haera !

Pa velimp ho pagik o tont,
 N'eo ket eur spes eo a sonjomp,
 Mas c'hui hor Mam, hor Rouanez.
 Ker deomp dreist pep tra : ar Verg'bez !
 Hano ar c'haera :
 Itron Varia !

Diskuezit deomp hent ar Vertuz
 Hon deus dizesket, maleürus !
 Evit ma savo deus ar bez
 Ar Feiz kos, ar Frans a nevez !
 Itron Varia,
 Hano ar c'haera !

Aotre da voula : Kemper, 3 here 1944.
P. JONCOUR, Vikel Vras.



D'an Itron Varia

(evit an distro)

Ton : *Ni ho salud, sterden vor*

Ni ho salud, o leun a g'hras,
 Ganeoc'h ma Doue da viskoas :
 Itron bepred Mam a Guerg'hes,
 Benniget dreist an oll grages !
 Itron Varia,
 Hano ar c'haera !

D'ho tiambrouk, o Rouanez,
 E tiredomp gant levez :
 Rac e pep leac'h ma tremenit
 N'eus nemet grasou da g'hounit.
 Hano ar c'haera :
 Itron Varia !

Abred ho peus karet Bro G'hall,
 Boulogn, Fourvier(e), a kement all :
 Chartr, ar Puy ho peus bizited,
 A mil leac'h a g'hrasou karget,
 Itron Varia,
 Hano ar c'haera !

Bro G'hall n'eo ket bet divezad
O tigemer ar c'helou mad...
Kals a lavar e c'hortozé
« Ar Verg'hez a ve Mam ive ».
Hano ar c'haera :
Itron Varia !

Mes kercent a m'och digouezet
Evel guichal e Nazareth,
Ar Frans abez eo a dridas
Evel Sant Yan, ar Prophet bras !
Itron Varia,
Hano ar c'haera !

C'hui eo kannad ho Mab Jésus,
Karget d'he gass d'ar bobl eürus
Hen deus krouet he Abostol
Evit he brezec d'ar bed oll.
Hano ar c'haera :
Itron Varia !

Mil hano var hor muzellou,
Mil imaj var hon Auterion,
A kant mil Ilis konsakret
A verk deoc'h ho taon hon respet.
Itron Varia,
Hano ar c'haera.

Brema evel eur Rouanez
Ho peus lezet tron a pales
Evit bizita ho poblou
A diskuill d'eo ho mennoziou.
Hano ar c'haera :
Itron Varia !

Mennoz trist pa vent en anken,
Pa vent eürus mennoz laouen :
D'ar pinvidik kouls a d'ar paour,
Gras skuillet gant eur galon aour !
Itron Varia,
Hano ar c'haera !

En amzeriou gris ma vevomp,
E selloc'h a druez ouzomp,
C'hui a velas var ho parlen,
Jésus maro, disliv a len.
Hano ar c'haera :
Itron Varia !

Eur c'hleze' dreuzas ho kalon
O velet toullet, pegen don !
He dreit, he zaouarn, he gostez,
Gant enebourien didruez.
Itron Varia,
Hano ar c'haera !